

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

En un ti korn war ar menez

En un ti korn war ar menez (bis)
Emañ va dous, va c'harantez
E dondo dansomp madondaine
Ge ! ge ! Dansomp madonde

Emañ va dous, emañ va c'hoant
Emañ va holl kontantamant *E dondo*

'Petra servij deomp-ni mont hon-daou
Na pa n'hon deus ket a vadoù

Nozvezh kentañ ni a lojo
En un toullig 'n ar bern kolo

A benn an eil pe an trede
Ni hor bezo kavet ur gwele

Hanter-kant nozvezh me 'zo bet
E-tal ho tor ne ouiec'h ket

Ha pa vijec'h bet hanter-kant all
Pa oan-me kousket, me oa dall

Dre toull an alc'hwez me a gleve
Trouzh hoc'h alan en ho kwele

Trouzh hoc'h halan va mestrez koant
A rae din soulajamant

Ar soulajamant zo ur yec'hed
D'an (hi)ni a kar he c'hemeret

Evidon-me ne c'hellan-ket
Rak aon am eus eus gwall bried

Rak m'az peus aon eus gwall bried
En anv Doue va c'hemerit

Ar glav, an avel a foete
Va dilhad me a zevere

Ar glav, an erc'h war va dilhad
An dour a yeas em daoulagad

Ha ma garfec'h ne vije ket :
Bezañ chomet en ho kwele

Me 'garje bezañ ul logodenn
Bezañ en ho ti barilh* ar brenn (* baill)

Bezañ en ho ti barilh* ar brenn (* baill)
Pe o talvout plueg dindan ho penn

Pe o talvout plueg dindan ho penn
Pe war ho treid talvout torchenn

Pe war ho treid talvout torchenn
Pe en ho keñver fumelenn

Pe en ho keñver fumelenn
An dra-se ne erruo biken